

**Andreou ar Bris.**

Sillaouit ag e kleffot, hag e kleffot kana  
 Eur vers a zo kompozet a neve er bлоa man.

Zo gred d andreou ar Bris deus ar pares Pluzelamb  
 Zo deud da Sant Jan evid kaout an absolen.

Kris e vije ar galon a kris ma na voelje  
 Bars e ~~porchet~~<sup>veret</sup> an de an eb a vije

E vellet ar ied glass ag an douer o glebia  
 Gant Daellou Dreou ar bris var an douer o skuilla.

Kris e vije ar galon a kris ma na voëlche  
 Bars er porchet Sant Jan an de an eb a vije.

E vellet andreou ar bris vond var penou e zaoulin  
 Bars er porchet Sant Jan dirag an imaj divin.

En an' Doue beleïen roït tu din an absolen  
 Ken du e va ine paour evel ma zeo va zoutanen

En an Doue beleïen roit tu din soulajamant  
 Ken du e va ine paour evel e zeo va forpant.

Kure a C'heroullas a person ar venec'hi  
 Ar vikel a Lanmeur savanta tri zo hen.

En an' Doue, beleïen roït tu din an absolen  
 Me ielo var ar groas da kovez brema souden.

Kurez(2) a c'heroullaz vez bemdez er gador  
 E explika an taollenou.  
 A kresk hoas va zourma(n)jou.

Nan deo ket va laeronsi, ken neubeut va uzulierez  
 Nag a zo dime koz da veza er bed man diez.  
 Mez allas siwas din o c'heuil gwal gompagnuez.

Adieu otrou Sent Jan da Rom me a renk monet  
M'ar deuan biken dar ger me a deuio c'hoas d'ho koëlllet.

Jannton Puil, 16 juin 1851.

(1) *Dans le ms Penguern, il y a 2 feuillets portant le chiffre 244.*

(2) *A partir d'ici, il n'y a pas de séparation marquée de strophes.*